

138

Hirvoudou
var maro
Molargez.

(76)

Var [ton]: Domp-ni oll breman.

Diredid oll, biaz ha bras,
Da quèmeret pers en hor gloas....
Molargez qez a zo maro :
An dro-man eo grêt e varo!

Hoc ho pe eur môr a zaelou
Da vesca gant hon hirvoudou,
Nan, nan, ne deufe'h birvigen
Da zibaoueza hon angen.

Goasso'h eget eur falc'h er prat
Eo deut ar Maro da falc'hat
Roue ar cher-vad en hon touez,
Hep nep remors, na nep truez.

Molargez a voa gourmand bras;
Gouscoude er c'heuzomp, allas! (77)
Taour ha pinvidic er c'harrie,
Rac gantân e zoat meurbet quiê.

Evel ma teu eur bar avel
Gant frouden da chass plouz ha pell,
Molargez en e rout zo et :
Evel eur squeud eo tremenet.

O Molargez ! peguer caer voa
Guelet en hon touez an oll jor,
O velet an oll oalejou
Prepari d'omp-ni fricojou!

Farz, rost, stripou, anduill, guin-ru

A voa serrichet a lez tu :
Te voa Doue ar follente
Hoc ar gontantamant ive.

Gouelit, gouelit, biaz ha bras :
Maro eo Molargez, sivoas!
Yaouanqis, maro eo an dang ;
Echu an oll rejouissang !...

Galvet e voe medecinnet
Da rêi da Volargez remed : (78)
An apotiger zo souden
Direded gant e zeringuen.

An oll soignou zo inutil....
Nespet d'an doctoret habil ;
Allas ! eur picol anduillen
Zo chommet en e gorzailen!

Sonjit en vanite ar bed :
En eun instant eo tremenet !
Allas ! Molargez zo maro :
Et eo da Gastel-an-Taro !...

Na glêver nemet hirvoudou
En Montroulez dre ar ruyou :
An oll a zo glac'haret bras
Da Volargez, maro sivoas!

Ra zervicho an dol da vez
D'hor guir vignon qer Molargez,

Hac unanomp oll hor moueziou
Da gana e veuleudion.

(79) Gwalc'homp errad hor gargaden
A win, ha criomp a boez penn;
Criomp a galon a eur voez:
Gloar hac enor da Volargez!...

Adieu! adieu did, Molargez!
Ressuscit da zont en hon touez.
Molargez! qen a vo da vloas;
Gant gras Doue ni cuelo c'hoas.

Lédan.

(Vol. VII, p. 76-79.)
strophes non numérotées.